



BUEZ AN OTROU

SANT MELAR

PATRON DE LA CHAPELLE

Prout a chapel en Brezennec er blas 731.

Var touz Gouz ar Drou Santjan ar Bia.

Preiosa in contemplatione Domini mors Sanctorum
Ejus. Psalm 115.

C'hoant bras tra eus, gant graç Doue,
 Da scriva ur c'hanab' neve,
 He fignema, euz a c'hoar,
 Buez an Otrou SANT MELAR,
 Euz a Sant Melar pa gomzan
 Eptenit petra lezaran,
 Et ilis vras a Gouz Lanneur,
 E Chapel ar dandan, ar c'hoar,
 C'hoar, Lanneuris, a so euz
 Gaout en tenzor-ger precius

3

Piou ta ne lavaro goude
 Voa ur mirast a re Doue,
 Dre ar glizet anezan an ee,
 O donarou a re Doue.

Doue en deus a bep euz,
 Roct gragouz partecialier
 Da nep er c'hoar a re Doue,
 Guelet a reomp scleramañt.

Milliau Tad ar Pring Melar
 En devoa ur breur heu digar,
 E haps a so Rivodus,
 Eun eil Cain malheurtus.

Qement a boan a re gantam
 Clévet na guelet anezan,
 Ne glasqe ar feçon bemde
 Nemet da gavet e vuc.

Gout Rivodus, te so traitour,
 Nen dout sur nemet eul layour,
 Biscoaz n'en deus da vreur Milliau
 Grêt ouzit e nep feçon gou.

Da vreur a voa caret gant Doue,
 Abel guechall a oa ive,
 Cain he laz gant drouc onta,
 Te ra ives ar memes tra.

Ar Pring Melar so yaouanqic,
 Nen deb nemet ur bug'elic.

Evel q'heuz a haurz Doue,
 Onz o miret bep nos ar de.

Mah' oa d'an Otrou ar Milliau,
 Pring ha Roue euz a Drouead,
 A lignes bras e voa Melar,
 Pa voa demens a goat royal.

Hervez ma caret rapet
 Ebarz en e vuez gallec,
 E dad hac e vras a vrec
 Ho daou en guic douzang Doue.

N'o devoa bet var an douar
 Bug'el nemet ar Pring Melar;
 Mab unic voa a dra certen,
 Hac heritour d'ar gurunen.

Qen agreabl voa o buc,
 Var ar bed-man dirac Doue,
 Ma cresqe bemdez o madou,
 En abondang dre e c'hraçou.

Biscoaz er spas euz a seiz bloa,
 Hervez ar vuez ma lenna,
 Ne euz en o douaro,
 E neb feçon ur banne glao.

Produi a rent gouscoude,
 Er spas euz ar seiz blavez-se,
 A bep sort lied en abondang,
 Peg'er bras eo ar Brovidang l

4

Incapabl eo euz a bep tra,
 Pa n'en deo qen nemet seiz bla.

Se a ra dit, q' ar rajet,
 Bezàn oute qer malicet,
 O clasq usap' o moyen,
 Ha possedito c'hurunen.

Espia a ra an amzer
 Propr evit ober e aller;
 Ur c'hrim eo so abominabl;
 Nen deo nemet ur miserabl.

Ar Pring Milliau ne ouic qer
 Trahison e vreur millig'et;
 Ne souje qer en devoa c'hoant
 De laza qer soubitamant.

Qementet en deus e Brinçet,
 Ar Roue Milliau d'e gavet,
 Rivodus en eur gev ive
 Er memes assamble, gante.

Mervel a ra va goaziet,
 Trelat a ra va speret,
 Pa deuan da gonsideri
 Ar c'hrim a ya da gometti.

E laza a ra ar tyrant,
 Var ar plas sdr soubitamant,
 Hep truez na compassion
 Hema eo an deñ arison!

5

Melar, setù c'houi miserabl;
 Allas ! setù lazet ho tat,
 Brema souden soudamant,
 Gant Rivodus e vreur mechant.

Né ouzoc'h qet ar gouezque,
 Re yaouanc oc'h en assuranc;
 Allas ! nemet gouela ne rit;
 N'ouzoc'h petra a livit.

Homan ar Brinces Haurilla,
 So fatiqet, mervel a ra
 O velet eur seurt trahison
 Erruet hep occasion.

Ne el na gouela, na parlant,
 O velet eur seurt accidant;
 E c'halon a rann gant glac'har,
 Pa sonch en he mabic Melar.

Clévet a rân moez ar Brincet
 Oll a eur voez o lavaret
 Adieu d'ho Mestr ha d'ho Roue;
 O pebez malheur, va Doue!

Un darn a guelc'h gant o daelou
 E gorf sacr hac e c'houlou;
 Darn all a sao ar Pring Melar.
 Hac e vam divar au douar.

Gouela a dleffec'h, Lanneuris,
 Pa antreit en oc'h Ilis,

7

Iaqet oc'h, da veza miserabl,
 Rentet oc'h bremau incapabl,
 Mes un Doue eo truezus,
 Mat ha misericordius.

Siouaz quasi ar memes tra
 A rêr d'ar minorec brema;
 Ma na droc'her qet o memprou
 Usurpi a rer o madou.

En eur gonsolit, Pring yaouanc,
 Doue so bras ha puissant,
 Biscoaz james n'en deo manqet
 Da nep er gar gant lealdet.

Un zel a zisqen eus an éc.
 Gantan un dorn a beurs Doue,
 Hac un troad guerc'h grêt admirabl;
 O Doue, emañ eo ar miracl!

Brema ta oc'heus, Pring Melar,
 Daouarn ha treid var an douar?
 Evit beza materiel,
 Couls int hac ho re naturel.

Doue c'hoaz memes a bermet;
 Dre ur miracl en e andret,
 Ma cresqe ar re materiel
 Evel e vemprou naturel.

Qen douc voa, qer carantezus
 Quz ar beorien qer vertuzus,

6

Oc'h ober meditation
 Var buez Melar, ho Patron.

Adieu d'och oll contantamant
 Ebarz er bed-màn, Pring yaouanc,
 Mestr eo hoc'h cont d'ho curunen.,
 Disposateur var ho moyen.

Sonjit erfat petra a rect,
 Ophelin oc'h brema rentet;
 Ho mam ha c'houi so truezus,
 O puez a so pitoyus.

Goude e grim abominabl,
 E za c'hoaz, an den detestabl,
 Da gonspira en e galon
 Demeus e ni an trahison.

Allas ! aon ameus, Pring Melar;
 Ne glæsq hoc'h cont, an den digar,
 O laza ha caout ho puez,
 Couls hac hini ho iat ivez.

Rei a eure commandamant
 Digas dezàn ar Pring yaouanc,
 Pa na allas qet e lazàn
 Oc'h ordren trouc'ha dioutàn

E droad cleiz hac e zorn deo,
 O va Doue, Crouer an Eo !
 Pa na allas e boignardi
 Mancout a ra disesper.

8.

Ma ravisse, gant guirione,
 Certen gement, den er guele.

Qer pur ha qer chast e vevet
 Evel un zel demeus an éc.
 Ma c'barraje e cont ingrat,
 O clévet, comz eus e vuez mat.

Aoun en dayor, ar miserabl
 Ar muntret, cris ha detestabl,
 N'en eur vanche a varo e dat,
 Ar Pring pa vije deut en oat.

Petra eo dide, Rivodus,
 Grena, o traitour malheurus;
 N'en deus gir gant an den Doue
 D'en em venji deus da grim-de.

Lézel a ra da bunissa,
 Nep en eun venjo, a bep tra;
 Un Doue eo n'en em drompl' qet;
 Eñez a eneo da bec'het.

Lazet ec'h eus da vreur, e dad,
 Troc'het ec'h eus memprou, e vad,
 Jouisa res oc'h e gurunen,
 Hac usurpet e oll voyen.

Petra fell dide davantacti?
 Nen deo qer, contant da tracti
 C'hoaz e renqi, am er goan erfat,
 Trempa da zaouarn en e voat.

7

Digemen a ra, ar muntrec,
Keryoltanus, ar mag'et,
Goulen a ra, interroji,
Ar Pring Melar, pelc'h emedi.

Pa velas erru aneza,
Er pedas da zont da leina,
Davetan un de-de bales,
Ma comzent o daou assambles.

Taol evez Keryoltanus,
N'eg em rentes ur malheurus,
Taol evez petra liviri,
Pa vezi gant an o tebri.

Me gleo dija an discourson,
A dremen entrezoc'h o taou,
Ne glasq nemet da banjoli,
Evit laza dezan e ni.

Madou ober en assuranç,
A bromet dit en abondanç,
Mar geres trahissa e ni,
Birygen dit ne vauco mui.

Aour hac archant ha douaro
Qement a g'ir tro var dro
A peso choas sur, va mignon
Mar gres erfat da drahison.

Mout ara Keryoltanus,
D'ar g'er triumphant ha joas.

11

Allas! setu-en goal gusulic,
Gant ar barner hac e briet,
An traitour fall ha divergant,
Monet a ra da gaout ar C'hont.

Dija eus seiz sizun anticr,
Aboe ma se et deus ar g'er,
Da gonspira pe var secon
Gallout ober e drahison.

Doue a douch calon ar vrec,
Ne ell na repos, na cousquet
Pa sonch ebarz en he bugel,
Pe var secon e renq marvel.

G'ervel a ra ar Pring Melar,
Conta ra dezan he glac'har.
Rac se diouallit, Pring yaouanq,
Me el lavar dec'h franchamant.

Var g'ement-ma e paritiont
Demeus ar g'er, hac e tenont
Ebarz en pvanur Douc,
Qercouls an eil hac egile.

En Q'zr Lanneur ec'h erruont
D'ar C'hont monet a reont,
Elc'h ma voa d'an amzer-se
Commer Letanant ar Rouc.

Ar C'hont Commer pa o guelas,
Gant cal a joa o recevas.

10

Ha pa arru ebarz er g'er,
E comz d'e brigd an affer.

Diouallit ive, mag'etes,
Ne vech ar brassa traitoures;
Penos n'o po truez ebet
Eus ar bugel oc'heus mag'et?

Oblijet oc'h da ziscleria
Petra fell da ober dezà;
Rac p'en deveus denet ho lèr,
Recourit dezan e vuez.

Qer contant eo hac he friet,
Pa gleo hano e vo p'et:
Pa gléver hano a archant,
Peb tra a rer assuramant.

Mar e pes archant ha mado,
Gra din qement a lavaro:
Nep a so paour a so cazet,
Nep so pinvidic so respetet.

Mar boq qer cre en ho lezen,
Mui eo brema a dra c'erten;
Pa zco contant ivez ar vrec,
N'en deus mui g'ir da lavaret.

Conta a ra c'hoaz d'ar barnet
Penos emedi an affer;
Rac c'hoas eo un neubeut doutus
An dan fall Keryoltanus.

12

Dre ma voa oar id'ar Pring Melar,
Ha ma voant olt a goat-royal.

Ar C'hont Commer hac e Briet,
D'ar Pring o deveus lavaret,
Chomit ganemp ama, Oirou,
Deoc'h eo hon ti hac or madon.

Grêt ama demp ho temeuranç,
Ni gret e viot en assuranç,
Ne sonch qer demp eve hini.
A grette dont d'oc'h ataqi.

Gant honor ha civilite,
Trugarecat ara awez,
Gant modesti ha temperanç,
E vev ebarz en ho fresanç.

E vuez a voa qen admirabl,
E viraclou qen remerqabl,
Ma clévas buan Rivodus
Pelc'h ezou an den heorus.

Evel ma cléves pelc'h e voa,
Keryoltanus, emezà,
Ar vech-ma e renques ober
Hep tardt pelloc'h an affer.

Er moment-se, hep tardt mui,
Keryoltanus a barti
E vab hac en da g'er Lanneur,
Elc'h ma vev grêt ar malheur.

13

En Qær Lanneur pa aruont,
Saludi ar Sant a reont,
Hac ar valiç en ho c'halori;
O va Doue, pezh trahison!

Ar Prinç a ra stat anese,
Gant ar joa en devoa onte,
Laqat rei deze da zibri,
Hac o loja er memes ti.

Pa voa aru anfin an nos,
Ha poent d'an oll mont da repos,
En er pedont da vont gante
En ur memes cambé evelte.

Setu eno an trahison
En devoa c'hoant an daou fripon
Da gometi en e andret,
E lazàn pa vise çousqet.

E vageres a lavaraz
D'ar Prinç Melar, pa o guelas:
Diuallit onte, Prinç yaouanq,
Aon am-eus n'en diñt daou dyrant.

Teulet evez mat, mar qeret,
Mar der davite da çousqet;
Deut int certen d'o trahissa,
Ne glesgont nemet ho laza.

Adieu, va bugel, emezi.
Ar vech-man vo an disparti.

15

Da ben tri de goude ma voa
Rentet ar pen d'an tyrant-mâ,
Surprenet voe gant ar maro,
Setu e recompans eno!

O pet sonch eta, Lanneuris,
Pa antréet en hoc'h Ilis,
Deus a varo ar Prinç Melar,
Hac e vuez var an douar.

E gorf sacr en deus reposit,
Pell bras en douar biniget,
En oc'h Ilis, dindan ar cheur,
Parossionis a Lanneur.

Eun archet men a so enni,
Elêc'h ma e bet o reposi
E gorf sact goude e varo;
Pebez tensor demeus an êo!

En Qemper-Caourantin emàn
E benn biniget a vremen;
Patron eo dêc'h en o paros
Hoc'h avocat er barados.

Gouel Sant Melar hac e Offis
Avez certen bep bloaz requis,
An deiz genta a vis Here,
En e henor ha gloar Doue.

Da goves ha communion,
An deiz-se oll en-o' pedan,

14

Me vev ervat hep tardi pell,
E renqet en maityr mervel.

C'houi pehini bete vremen
Zo bet ur sant var ar bed-man,
O pet sonch en ho mageres,
Pa viot ebarz er barados.

Pa voa ét an oll da repos,
Ha qeret an dorjou clos,
E çibennas, an daou dyrant,
Pa voa çousqet ar Prinç yaouanc.

Pa o devoa grêt an torfet,
Ober an tec'h o deus sonjet,
Da gas ar peñ da Rivodus,
An daou massacrer matheurus.

Dre ma voa teval an amzet
Hac al'choezet clos ar perzier,
Instantus o vont en he rout,
E tal an ti a dor e çhouc.

Cas a ra Keryoltanus
Pen Sant Melar da Rivodus,
Da gontanti e gueldet,
En esper bout recompanset.

Neuse souden e permetas
Doue ma varvas var ar plas
Setu pe sort punition
En peamant d'e trahison.

16

Evit alumi en ho calon
D'hor Patron an devotion.

Auteur er vers-mâ a suppli
Qement den a glêçq anei
Da laçet a galon barfet,
Peb a bater en o reqet.

M'or buçoll goude hor maro
Digant Doue, Grouer an êo,
Lot assambles gant Sant Melar,
Deus ar joustet hac ar gloar.

A M E N.